

CHANSON YANIC FRIPON



Voar Ton : Je vous supplie Mesdemoiselles

Me zo pedet gant eur mignon
De vouloir bien raconter
Darn demeus va zroyou fripon
De ma jeunesse passée.

Da guenta me am boa sonjet
Quand j'étais jeune garçon
Penos etoues ar ganfardet
Que j'étais tout le Bonbon.

Dar poent se me a oa yaouanc
Je n'avais que dix-huit ans
A pa zanssen gant merc'het evant
On me donnait des rubans.

Goude an danz certainament
Je voulais aussi fumer
Mez n'am boa quet temperamant
Et j'étais très ennuyé

Pa vijen bars en tachennou
Je fumais comme un dragon
Va daou zron ebars em bragou
Je me croyais le tonton

Eun tamou moustachou netra
J'avais aussi sous le nez
Eur chaden vont eus ar c'haera
Je portais à mon côté

Jamais canfard evel din-ma
On avait vu par ici
Guiskamanchou eus ar propa
Et un chapeau de bibi.

Me valeai velt eur ponssin
Presque comme un officier
Cals a lare e.oan pot fin
Et j'étais très enchanté.

Eun deves e oan saludet
Je me trouvais honoré
Me o gred e oan kemeret
Pour le Mair' de la contré

Me blije dar merc'het yaouanc
Et partout j'étais connu
Ac ouspen e oan eur c'hliant
Comm' vous n'avez jamais vu

Evelt eur piler patates
Je racontais des discours
Ne gonte ker braou d'am mestres
Et ell' me croyait toujours

Pa nem gaven gant ar merc'het
Dans les foir' et les pardons
Bepred e comzen en galleg
L'air d'ignorer le breton

Gallec mad ouïen ket ives
Je me trouvais très gêné
An drase credet so dies
Quand on n'sait comment parler

Aroc kuitad an assamble
Je payais toujours à boire
Goude ze me e c'hunduai
Tout à fait jusqu'au manoir

Tont dar guear n'eur gonta cojou
Je l'embrassais quelques fois
Ober dei tamigou jestou
On m'aimait bien malgré ça

E ne zi pa nem gaven
Aussitôt j'étais prié
Gant va mestrezik canfanten
Mon ami venez souper

Var an dol vije digasset
Du vin et de l'eau-de-vi'
Bara guinis a viou fritet
Et bien d'autres chos' aussi...

Gant va mestres vijen pedet
Mangez donc mon cher ami
Goude termad gand re govald
Mangez toujours je vous pri'

Neuse chenvel eus eun toussec
Il me fallait bien lever
Da guitad vijen oblijet
Quelques fois très embêté

Daoust ama blichen dar merc'hed
Ecoutez-moi mes amis
Ve ret c'hoaz dibri patates
Et souvent de la bouilli'

Alies goude corvadou
Il faut souvent se priver
A goude ober cals troyou
Rester souvent sans trouver

Me meus clasquet me meus cavet
Et si vous faites comm' moi
Ac oman m'ar bec'h refuset
Allez-donc jusqu'à là-bas.

FIN

MA PETITE JEANNETTE

Bonjour ma petite Jeannette,
Il y a six mois que je ne t'ai pas vu,
J'ai appris dans mon voyage des nouvelles du pays
Que tu n'étais pas sage comme tu me l'avais promis.

Mon cher amant que me dis-tu là ?
Est-ce que je n'ai pas d'amitié pour toi ?
J'en ai trouvé bien d'autres, bien d'autres à mon gré,
Cher ami pour t'attendre, je les ai refusés.

Eh bien ! pourquoi les refusais-tu ?
Tu voyais bien que je ne t'aimais plus
Tu ne voyais plus mes lettres ni mes papiers marqués
Tu voyais bien Jeannette, que je t'avais oubliée.

Approche-toi et viens m'écouter,
C'est la jalousie qui te fais parler,
Tu n'as pas de fortune, ni même assez d'argent,
Pour acheter une bague que l'on donne en se mariant.

La première bague que je te paierai ;
Ne te fera pas mal aux doigts
Je paierai à une autre qui sera plus à mon gré,
Et toi ma petite Jeannette, tu resteras de côté.

Ah ! quel bonheur que tu m'as laissée
J'en trouve un autre pour me marier
Tu as des idées volages ; jaloux tu seras toujours ;
A la fin de ton âge tu feras un triste amour.

CHANSON NEVEZ

Great var sujet un den yaouanc deu ar Roc'h, e canton Plouziri, pehini a gare re he vestres

Guinidic on deus bourg a Roc'h
Va hano so Yvon ar Bloc'h
Tud honest voa va mam, va zad
Me a so den fall eus a lignes vad.

Va zad a va mam o devoa madou :
Mes ne moa tam goud evit ar studiou
Dar scolachou ho devoa va c'hasset,
Eun avis ober ac'hanon eur belec

Pa da ar studierien da studial,
Me a ia dan davarn de eva,
Da vale an nos dre ar ruyou,
Ho teski langachou fall d'ar yaouankisou

Va zad, va mam pa ho deus clevet
Coms divarben va bues direglet,
Ma kemenas dime va zad
Da zont d'ar guer da labourad.

Kerse a vesò gant va gostechou,
Kregui er pilli ac en tranchou,
Goude besa bet mestr scolaer,
Ho vannia ar plun var ar paper

Mes ne voant quet bed pell n'ho zi,
Ma'procurchon va dimesi,
Mar procuras dime va zad
Eur plac'hic yaouanc eus a lignes vad.

Var bordie pemp cant scoet me a moa bet
Douar a tiegues gand va fried,
A zindan daou vla me meus o frippet
Mes dre va c'hondu direglet.

Ha setu me mont da Roason;
Evit eun em engaji da zragon :
Mes pa voa deud ar poent da bartial,
D'ar guer e ziredis ractal.

Neuze d'ar guer da di va zad,
Hounnes oa dezan eur galonad
Goude beza fripet e oll vadou,
Hoc'h va entreteni er scolachou.



CHANSON NEVEZ

*Var sujet eur martolodet Yaouank pehini a guita e vestres evit mont da ober euse
c'hampagn d'ar Russi.*



1^e Couplet

An nep a velfe Napoleon var cornic e jardin
Divouton e jeleuten a criset gantan e vinn,
Da sez heus a mintin ieas er mes
Mont a ran d'ar Russi, neur lavaret *mea culpa*

2^e Couplet

E Russi pa voanp erruet
E penn va bataillon
Me a scrivas eur lizer
Da galmi va c'halon.

3^e Couplet

Me a scrivas eur lizer
D'am mestres fidel
Eur plac'hic yaouanc flam
Ha greis va c'halon e garan

4^e Couplet

E neur arriout e tal au nor
E meus goulenet digor
Prontamant hi a savas ive,
Hac an nor prestic a zigoras

5^e Couplet

Ne voant ket chagrinet bras
E voant commandet da c'hoarzin
Va mestres c'hoarsas ive,
Hac hi carguet a chagrin.

6^e Couplet

Na petra a peus va mestres
Ma zoc'h ken chagrinet,
Red eo a tarre e ves
Gant e savancher pleguet.

7^e Couplet

Gant e savancher pleguet
Red eo e man adarre e ves
Gant e c'homzou languissant
O frappa var va sujet.

8^e Couplet

C'hui so eur plac'hic yen
Mar a so var an douar
Nag e peus eur garantes
Na ne na tom na clouar.

9^e Couplet

Chui a so evel eur fleuren
Divoanet var bord en enchou,
A risk da yesa destumet
Gant ar c'henta a basseo.

10^e Couplet

Chui a so evel eur rosen
Divoanet e creis an an,
Na pas deuy eun nosves reo
Adollo e delliou d'an trao.

11^e Couplet

Chui a so allum diallum
Nag e guis eus pen goullen
Pa ve troet va c'hein ganen
E redet ractal d'an abattou.

12^e Couplet

Arça eta va mignon
Aaoulc'h peus lavaret
Sonnet eo an anter nos
Gant Mari-Magdalen.

13^e Couplet

Losquit an anter nos da zon
A saludomp ar mintin
Nequet lavaret Mari gues
He teufen d'ho koelet ken

14^e Couplet

A pas veo'h en ho koele,
E creis tre a lisseriou
Me a vo e ober faction
Kichen an nor var a ruyou.

15^e Couplet

Va c'hasketten var va fen,
Ha cazi dirreliet,
Pa zan dam goele en dro
E vezan casimant frimet.

KLEMOUT

SUR PLAH MANKET

VAR UN TON TRIST

Selaouit brema va moes va hamaradeset
Houi pere hem yaouankis e meus bet cals caret
Eus a doulit ha ludu me ra deah va klemou
Deut oll assambles gani ka versea a taelou

Me meus colet brema ma reputation
Ma halon a so carget a zezolation
Dre ma meus credet siouas la fos camaradou,
E meus collet ar haerra demeus va bouqejou

Beteg vrema me hallai larea voues buel
E voan kerra femeulen a oa en breizisel
A brema me so hudur en toes an ol verhet
Pa eo va haerra bouquet siouas gani collet

Henes oa carrea tensor e oa bars er bedma
Ne gavit quet enep leah da brena sort desa
Dre vesa deut da gredi camaradet traytour
E meus lesset va bouquet da vonet gant an dour

Pa dean d'examina ar voul rond deus ar bed
Siouas me vel varnaisi brema cals a verhet
Pere so colet gantai couls a me ho rosen
O vesa deut da fiout en comsou treitourien

Va oll gerent so siouas gani disinoret
Va chans so dinatur va flanedan calet
Va halon so en irvout couls en nos vel en de
Me a houlen ar maro vit disqen em be

Goude va fragilite me so en oll an keniet
E compren bars stad trist pihini on rentet
Beteg brema me meus bed douget cocardeno
Brema e meus eur bissar eur vas da vont e dro

Beteg an noad a ugrent vla me meurbet bevet
Ebars en doujans Doue evel ma voa gleet
Neuse me voa caret gant an oll em antan
Neuse camaradeset voa la oen va halon.

Goude ne meus bet eulet couls en nos a en de
Ar goel gompagnunes a voa bars e hontre
Dre se me so mepriset ebars en breusel
Va evrustet er bedma so et gant an avel

Ne meus quet heuillet siouas avis tad na mam
Dre se ne meus get galet beya ive divlam
Groet e meus scouarn vousar pa glevan anai
Koulcoude deus bet laret ar viriones dimai

Lavaret so bet dime gante sur alies
E eul goel gompagnunes mijie tristidiges
Mes dre ma oan yoanc veprisen holl groasiou
A se ra dime brema seuil en mor a zasiou

Ma mijie bet ho hredet keuliet ho gourlaouen
Ma bues camaradezet vije bet laoën
Mes pa meus qet sentet brema demeus ar stur
Allas vit deus ar garec e ranki ober zur

Nos a de e mon en neur stad trist meurbet
Avichou me un tam da zibri goechal ne ve qet
Goude ma ve erh a scorn yen bras an avel
Keuneut na mo qet dober tan da doma ma bugel

Houi va hamaradeset goude va oll anqen
Deuio oas dam goapad gant eur galon laouen
Mes ma kemerit an hent pehini so danger
Houi peso eveldon da zougen eur beh poner

Allas camaradeset daou hent so er bedma
An hini gemer an hent mad neus da zougen beh
Nep a gemer an hini fal bale voar va roujou scanchou
Neu eun poner da zougen a cals a dourmanchou

Vit var ma choue brema so eur beh poner
Ag a meus deus e zougen cals a boan a miser
Dalhet vezin den douguen beteg fin va deiou
Adieu dan yaouankis ha dam plijaduriou.